



KIMIAD AR ZOUDARD YAOUANK

gant Prosper PROUX.

War an tōn ordinal pe war an tōn neve-man.

Ma c'halon a zo frailhet dre nerz ma enkrezou. Ma da -
ou - la - gad en - ta - net n'o deuz mui a zae - rou, Deud
eo siou - az! an devez ma ren-kan di-le - zel Lec'h
kaer ma bu-ga - le - ach, ma bro ga er Breiz-Izel...

Ma c'halon a zo fraillied dre nerz ma enkrezou,
Ma daoulagad entanet n'o deuz mui a zaerou;
Deud eo, siouaz! an devez ma renkan dilezel
Lec'h kaer ma bugaleach, ma bro gaer Breiz-Izel !

Keno d'id, ma zi balan, kuset 'barz an draouien,
Tachen c'hlaz war behini, bugel, e c'hoarien ;
Gwez ivin ker bodennek, e disheol a bere.
E-pad tomder an hanvou, e kousken da greiz-de.

Keno ! keno ! mamm ha tad, breman n'esperit mui
E chomfe ho mab kared da harpa ho kozni,
Evit gounid d'ec'h bara, 'vel m'hoc'h euz gread d'ezan ;
Al Lezen zo didruez, ho kwitaad a renkan.

— 2 —

Nag a wech, ma mammener, e renkfet-hu lenva,
 Pa zeuy ma c'hi ankenied en-dro d'ec'h da ruza ;
 Pa welfet, war an oaled, ma skabellik c'houllou
 Hag ar c'hifnid o steui war ma fenn-baz derou.

Keno ! bered ar barrez, douarou binniget,
 Pere a guz ma c'herent gand ar Zalver galvet ;
 Da ouel an Anaon klemmuz, n'in mui war ho peziou
 Da skuilha dour binniget mesket gant ma daerou.

Keno ! ma muia karet, ma dousik koant Mari,
 Eur blanedenn digar a zeu d'hon glac'hari ;
 Euruzded ha levezenez skeduz zo tremenet
 'Vel en oabl ar goumoulen gand an avel kaset.

Na welin mui da lagad ker lemm ha ker laouen
 O virvi gant plijadur, e ti pe erruen,
 Da zournik gwenn ker mibin o trei ar c'har en dro ;
 Da vouez flour mui na glevin o kana va gwerzo.

Pa oamp er c'hatekismou, hon daou c'hoaz bugale,
 Hon c'halonou diskiant, e kuz a 'n em gleve ;
 Dirag Gwerc'hez ar c'hoaz-hent, nag a wech e touejomp
 Na erruje birviken disparti etrezomp !

Yaouang ha dibreder, siouaz ! ne wiemp ket
 Nag ha bet c'houerventez er vuez zo hadet ;
 Evidomp ne oa, neuze, Lezennou na Roue,
 N'anveemp 'med eul Lezen, hini ar garante.

Keno ! ma nez-amezek, Yannik ma gwir vignon,
 Kamarad ma c'hoariou, ma breur dre ar galon ;
 Piou a gemero breman lod ebarz ma foanio ?
 Piou a gomzo ganin-me deuz ar gear hag ar vro ?

Hepdoun te yelo breman d'ar parreziou tosta,
 Da bigosad al leuriou 'barz el lajou-dorna ;

— 3 —

Hepdoun te yel da c'hounid maout ar c'hourennadek,
Da chasa war rubanou ebarz er varadek

Keno ! ma c'haszek velen, skanv evel eun heiez,
Mistr evel eul logoden, jentil vel eun oanez ;
N'ez santin ken dindanoun, gand an hast, o tripal,
Ma daouarn mui ne stagint ar zeien war da dal.

Keno ! ma c'hi keaz Mindu, ma leal kamarad,
N'efomp ken, dre ar c'hlizen, da glask roudou ar c'had ;
Ne glevin ken, er menez, da chilpaden skiItruz,
War ma dourn mui ne zantin da deod karantezuz.

A-benn eun nebeud amzer, kalz a vignouned yen,
'Barz er zoudard divroet, hep mar, ne sonjfont ken ;
Mes da galon-te, Mindu, n'eo ket ken ankoezuz,
Pell e ri c'hoaz va c'havou, gand da yezou kleimmuz.

Keno ta, plijaduriou, leuriou-nevez, prejou,
Nezadegou, nozvezion, foariou ha pardoniu,
Ebatou ker birvidik, biniou zard ha sklentin,
Na drido mui va c'halon gand da zoniou lirzin.

Keno kemend a garan, keno da virviken !
Pell diouz a Vreiz me varvo, manret gand an anken !
'Vel eur blanten gizidik, evid ar vro krouet,
A renk gwenvi ha mervel, kerkent m'eo divroet.